

oremañ

STOURM AR BREZHONEG ER C'HUZUL RANNVRO



Un darvoud a-bouez e miz even
Gouel-broadel ar brezhoneg

Erratum Bremañ 127, p. 3 :

Er pennad kentañ : Votadegoù rannbarzh Breizh: Ur Pouez Nevez ? Ret a oa lenn : "Saul reishoc'h e seblant ar goullenn (gouzout peserit skudenn a oa gant listennoù an Emsav) pa weler an 10% gounezet mat an U.D.B. e kanton Karaez. Trech Ivon Abiven e kanton Sant-Tegoneg, bet en U.D.B. betek 1984 ha dilennet e kuzul-meur Pennar-Bed war e anv e-unan, a c'hell reiñ ivez da brederiañ."

Lizher da vBremañ

CFDT Breizh a respont da bennad Per Denez "Distarkañ an hentoù stanket"

"E niverenn 126 BREMAÑ, miz Meurzh, e venegit eo bet lakaet votiñ gant sekretour meur ar CFDT er C.E.S.R. (Kuzul Ekonomikel ha Sokial Breizh), un enep-kinnig a lamme kuit un darn eus an danevell lennet gant Per DENEZ diwar-benn sevenadur Breizh.

Fellout a ra deomp resisaat e oa hor mennad kentañ tennañ kuit eus danevell ar bodad-labour e-karg, kinniget gant Per DENEZ, an tri kilinnennad a groge gant ar gerioù : "En un doare personel, me ..."

N'hell hini ebet asantiñ, hag ar CFDTne raio ket, e vefe degemeret, gant ur vodadenn demokratel, kinnigoù personel hep bezañ bet dalc'het ha roet da anaout en anv ur bodad-labour pe ar vodadenn veur.

Evit pezh a sell ouzh distro da Vreizh an taosoù skinvell paeet gant ar Vretoned ez eo kemplesoc'h an traoù eveljust ha gwelloc'h e vije bet d'an danevell lakaat e vodad da labourat war an danvez kentoc'h eget rediañ an dud da zegemer e soñjoù personel.

Forzh penaos, n'em ziazaz ket CFDT Breizh war ar skodennoù, tailhoù pe taosoù paeet gant ar Vretoned evit goullenn kaout en-dro an archant, met war ezhommioù hor rannvro hag an dud a vev enni.

Gwell e kavomp ar genskoazell eget ar rannadenn stnzh.

Gant hor gwellañ soñjoù,

Michel REGEREAU Sekretour Meur CFDT Breizh - Sant Brieg - 29/04/92

Doriou Digor DIWAN

Lannuon - Laouen e vimp o tegemer ac'hanoc'h e skol Logivi-Lannuon da geñver "an doriou digor" a vo aozet d'ar Gwener 15 betek ar Meurzh 19 a viz Mae. Kavout a reot ivez pljus-tre dont niverus d'ar c'hermes, d'ar sul 17 a viz Mae. Evit kaout tiboù : Skol Diwan Logivi-Lannuon pgz 96.37.49.03

Roazhon - Degemer mat vo graet deoc'h e-kerz Dor-Zigor Skol Diwan Roazhon d'ar Sadorn 23 a viz Mae adalek 10 eur mintin 96, Kanol Sant Varzhin (Karter Straed St Malo) - Lakaet vo Alan Stivell (deut da chom e Bro Roazhon) da baeron ar Skol. Ul lid a vo diouzh ar mintin evit an degouezh-se.

Notennig : ul lavrig brav 'brudañ ar skol' zo bet savet gant un nebeut tud, o tisplegañ petra eo Diwan, perak, penaos... ha dazont hor skolioù a Breizh hag en Europa. Gourc'hemennnoù dezho.

Kinnigoù-labour

Diwan a glask

Skolaerien-stajidi : live Bac+3 brezhonegerien - Stummadur gopret - 2 guzulier pedagogel evit skolioù kentañ derez Diwan - skiant-prenet mat ganto war ar c'helenn ha brezhonegerien ampart war pep tachenn.

3 c'helenner hanter-amzer evit Skolaj Diwan R.Hemon Brezhoneg, Galleg, saozneg ha teknologiezh. Aotregezh goullennet ha skiant-prenet war an danvez-kelenn - rankout a ra ar gelennerien bezañ brezhonegerien ampart eveljust.

Evit an diabarzhidi (Pañsion) : 2 animatour barrek war ar Brezhoneg (hanter-amzer)

Evit lakaat hoc'h anv war ar postoù-mañ skrivañ ul lizher en emginnig hag ur CV. da : z- Diwan - B.P. 22 29870 Lanniliz -

AN OALED zo o klask war lerc'h un objektour (brezhoneger ma z'eus tu) adalek ar 1/5/92.

Kasit CV+ lizher da : An Oaled, 29870 Treginou.

Galv

Brezhonegar (D.E.C.), tregont vloaz, brezhoneger ampart, dilabour adalek ar 01.09.1992 (bloavezh sabbatik) a glask labour e Breizh (Gopr 5000.7000 lur) leun amzer - Pellgomz goude 6e30 abardaeg 38.80.09.46.

TAOLENN

BREMAÑ niv. 128 miz Mae 1992

Lizhiri 2
Yezh 3
Dilennadegoù 4-5-6-7
Europa 8
Berr ha berr 9
Etrevroadel 10-11
Taol-pluenn 11
Nukleel 12-13
Iwerzhoneg 14-15
Keleler Breizh 16-17
Lennegezh 18-19
Gouel broadel 20

Maketenn gant Lena Louarn ha J.M. Roynard.

Skoazell gant Kristell Louarn, Nadine Quetier ha Paskal ar Marcheg.

Difaziañ gant Olier ar Mogn.

Pennadoù gant H.K., Paskal ar Marcheg, Jean-Michel Tilly, Jakéz- Erwan Mouton, M.K., Anna-Vari Chapalain, Yann Manegwenn, Hegareg, Lena Louarn, Aline Gleoneg, Alan Heusaif, T.G., Olier ar Mogn.

Luc'hskeudennoù gant Lena Louarn, Nadine Quetier, S&V, Anna Vari Chapalain.

Renerezh BREMAÑ : Lena Louarn

Krivit e-barzh BREMAÑ ! Kasit ho pennadoù, gant skeudennoù, dreist holl ! war baper, pe gwelloc'h pladennig a-raok ar 25 a viz Mae ! Trugarez deoc'h.


Devezh-labour ha studi gant skipailh Bremañ : Gwener 8 a viz Mae, da 10e30 mintin. ☎ 99 38 75 83

Ar pennadoù ne engouestont nemet ar re a sin anezho.

Koumanant : 180 lur ar bloaz, skoazell : adalek 200 lur ar bloaz.

BREMAÑ, 8 ru Hoche, 35000 Roazhon, BREIZH.

Skouer Elzas, Euskadi, Kembre kinniget gant Kuzul Meur Penn ar Bed Brezhoneg d'an oadourion



A. JONES, H. PROSSER, D. ZETER, J.Y. COZAN, Y.F. KEMENER, I. ITHURSARRY, F. OLMETTA

D'ar Gwener 17 a viz Ebrl e oa bet dalc'het un emvod en Nivad, e Lopereg, war atiz J.Y. Cozan, e-lec'h m'o doa bet tro ar berzhidi da glevout keloù war an doare ma vez aozet ar c'helenn yezh d'an oadourion e Korsika, Euskadi, Elzas ha Kembre. Tro a oa bet ivez, da c'houde, da eskemm mennozhioù etre an dud (anezh o kelennerien skolioù-noz pe aozerion kentelioù d'an oadourion) war an doare da vont pelloc'h gant o labour. Souezhet e vo marteze an dud o c'houzout ne vo hogos netra da zeskñ digant Korsika war ar c'hras-se, dister ma tiskouez bezañ al labour hag ar preder war ar c'hentelioù-noz.



Perzhidi an emvod : animatourien kentelioù-noz e Penn ar Bed

diazezet war ur preder kevredigezhel gant ar pal spalln da "adeuskakeaat" ar vro. Un aozadur broadel diazezet war krazennoù lec'hel eo AEK, distag diouzh ar galloudoù politikel en Norz pe er Su e ve. Ploustrat o deus katz war an hentennoù kelenn, an dafar hag ar stummañ kelennerien met ivez war ar pezh a rank an dud ober gant ar yezh e-maez ar c'hentelioù.

Doareoù disheñvel

E Kembre ez eo heñvel ar preder pa 'z eo disheñvel a-walc'h an doare. Aozet e vez kentelioù d'an oadourion gant ar Skolioù-Meur, ar c'hengorioù kentelezh pe gant kevarezhioù dizalc'h. Hogen gant Cyngor Addysg Cymru an hini e vez kenurzhiet ar c'helenn a-fet hentenn, dafar kelenn koulz ha stummañ kelennerion nevez. Ur gearvazhe, CYD, a bled gant an tu "kevredigezhel" d'ar yezh dre aozañ degouezhoù pe oberiantizoù diseurt dre ar c'hembraeg evit ar re a zo o teskiñ.

Etre Kembre hag Euskadi ez eus ul liamm amat avat a-keñver kenurzhiañ an hentennoù pe ar stummañ. En div vro e vez graet diouzh "paliou kelennti" evit kelenn ar yezh, da lavarout eo degas tamm ha tamm baregezhioù da eskemm dre ar yezh e degouezhoù resis.

O meno o deus graet ivez tud Kembre koulz ha tud Euskadi da lakaat ar yezh da yezh kevredigezhel troet war an dazont. War an daou boent-mañ moarvat an hini e rank ar Vretoned kemer skouer bapred.

Kenurzhiañ

Dres a-walc'h, ur sizhun a-raok emvod an Nivad e oa bet dalc'het unan all e Gwengamp war atiz STUMDI hag o vodañ un nebeut kreizennoù skolioù noz d'an oadourion. Eno e oa bet renabiet ar poentoù a ranke bout diluziet a-benn sevel ur gwir kenurzhiaez d'ar c'helenn brezhoneg d'an oadourion.

E miz Mae e vo dalc'het un emvod all, ledanoc'h, a glasko mont betek ar c'hanurzhiañ-se a ra kement a ziouer d'an danvez-brezhonegerien

GWIR pe GAOU

Daoust ma peila an dilennadegoù-rannvro e chom ar ra-mañ un danvez diviz avidomp. Distraññ a rin war ur c'hral o tennañ da zlefenadur an darvoudoù.

Mouget o deus, a lavarer, an divizoù diwar-benn kudennoù "broadel"⁽¹⁾ an divizoù diwar-benn ezhommoù diabarzh ar rann-voioù.

Gwir eo. An dilennadegoù-rannvro ez eus bet sellet outo, a-raok pep tra, evel ouzh prientidigezh an dilennadegoù-kannaded. Muioc'h ez eus bet komzet eus danvez-dilennidi an FN eget eus danvez-dilennidi al listennoù rannvro.

Keuz a c'heller da gaout, enta, e vije aet ar gaoz, gant kudennoù "broadel", hag e vije bet mouget ganto kudennoù "lec'hel" pe "rannvroel": ur c'helaouñ kempenn, en dije bouñtel listennoù an Emsav betek ar 5% rekis.

Ar gaoz, avat, a c'heller kas pelloc'h. N'eo ket an dilennadegoù-rannvro dilennadegoù-kêr pe dilennadegoù-departamant. Urzhiadur he rannvroù a bouezo kement war da-zont Bro-C'hall ha savidigezh Europa. Kouz hag ar re a zo bet tabulet diwar o fenn da vare an dilennadegoù eo kudennoù ar rann-voioù e Bro-C'hall ur gudenn diazezh.

E-lec'h ma wel lod kudennoù "broadel" o vougañ kudennoù "lec'hel", enta, e welan-me ur gudenn "vroadel" a laosker a-gostez.

Diazezh ar vuhez, hag hini ar rannvro e vefe, eo ar wirionez. Da ziorren, - da ziorren da vat, - da brederiñ war he dazont, da raktrasañ anezhañ, e tle ar rannvro dastum gouzidigezh diwar-benn pep tra: diwar-benn hec'h armerzh, evel just, hogen diwar-benn hec'h istor ivez, ha diwar-benn he sevenadur⁽²⁾.

Ar ouiziegezh diwar-benn an istor hag ar sevenadur, ar wirionez, a lak en arvar "unanaded Bro-C'hall", a ra ur gaou anezhi. Enebiezh, zo enta, etre djorroadur ar rannvroioù hag unanaded Bro-C'hall.

Ur c'hleved eo ar broviñselouriezh, ur c'hleved eo ar c'hreizennañ. Ezhomm ez eus, avat, eus ar c'hlevedoù-se, a zo skoilhoù d'an diorren, da skorañ unanaded Bro-C'hall. Ne glasko morse ar Stad parañ anezho: louzaouiñ merkou-diavaez zo a raio hepken.

Bez e ranker, enta, sellet ouzh kement tra a denn d'ar rannvro evel ouzh ur gudenn "vroadel". Degemer e vefe distraet an diviz rannvroel, - degemer e vefe lakad da zanvez lec'hel pe rannvroel, - a zo ober gaou d'hor bro ha kenlabourant gant ur vro a zalc'h he fobians en ur stad a isidioroadur spered.

Dilennidi nevez Pobl Breizh Promesaoù sinet da zerc'hel



Dazont ha SAB chomet da evezhiañ dor ar C'Huzul Rannvro

D'al Lun 27 a viz Ebrel, da 15e, en em vode e Roazhon evit ar wech kentañ ar C'Huzul Rannvro nevez. Stourm Ar Brezhoneg ha studierien Dazont a oa eno. O fal a oa degas da soñj an dilennidi ar c'hinnigoù hag ar promesaoù o doa lakad dre skrid, da vare an dilennadegoù, en o respontoù da c'houlennadeg Stourm Ar Brezhoneg. Roet ez eus bet da bep dilennad ur skrid o tisplegañ mennadoù Stourm Ar Brezhoneg ha dreist-holl al labour a rank bezañ kaset da benn gant ar C'Huzul-Rannvro:

- ur politikerezh yezh gant ur c'hengor aratozh hag ur c'hellid-steuñv (ur budjet) distag.
- ur diviz war hir dermen diwar-benn dezvad ofisiel ar yezh, lec'h ar yezh er gevredigezh, ar c'hellenn hag ar skinwel brezhonek.

Pouezañ a ra Stourm Ar Brezhoneg war ar perzh a rank ar C'Huzul-Rannvro kemer e krouidigezh ar ganol skinwel e brezhoneg: "**Bez e rank ar ganol skinwel bezañ ar chantor bras kentañ da vouc'hañ hag evit se e rank ar C'Huzul Rannbarzh ober dibabou sklaer a-fet arc'hanterezh, stummañ ha tuta, darempredoù gant ar C'Huzulioù Meur hag ar broioù all**".

Echuiñ a rae ar skrid gant ar c'homzoù-mañ (ha ganto e krog ivez an darempredoù etre Stourm Ar Brezhoneg hag ar C'Huzul Rannvro nevez): "Ur gudenn bolitikel eo kudennoù dazont ar brezhoneg. Gant piv e vo talet outi ma ne vez ket gant dilennidi Pobl Breizh. Chom a ray start Stourm Ar Brezhoneg evit ma vo sevenet kement a zisplegomp amañ gant Kuzul Rannbarzh Breizh 4 departamant".

Paskal ar Marc'heg

(1) "Broadel" diwar sav-pont Pariz
(2) Kamm e vo kement barnidigezh war armerzh Breizh ma ne zalc'h ket kont eus Bro-Naoned, a zo e Breizh en abeg


d'an istor. Penaos e c'helle an ijinerzh diorren en hor bro ma tistager diout kement lodenn diorret a-fet ijinerzh: Naoned dech, Roazhon warc'hoazh?

Unvaniñ muioc'h c'hoazh

An Emsav goude an dilennadegoù

gant Jean-Michel TILLY

An dilennadegoù nevez tremenet a c'hall bezañ prederiet diwar-benn o disoc'hoù e meur a geñver, hag evit pezh a sell ouzh ar re dizhet gant an Emsav da gentañ.



Kuit a goll amzer o tabulet diwar-benn efedoù nac'hus 'zo en hol labour-dilennad ebet da skouer- e welan-me kentoc'h aspedoù yaüs e sifroù an div listenn evit Aodou-an-Arvor: 4,5%. Met anat d'an holl ez eus bet koll gansomp o sevel div listenn e-lec'h unan hepken. Koll gant al labour war an dachenn, a vije bet aozet gwelloc'h, donoc'h, gant muioc'h a oberiantiz, muioc'h a fiziñs eus perzh ar vouezhierien ivez marteze. Koll arc'hant war ar marc'had... 12872 mouezh evit an div listenn, diwar 286019. Mankout a rae 1400 pe war-dro evit kas unan e-barzh. Anat d'an holl eta e vefe ret - er prantad a-vremañ eus hor stourm - sevel listennoù unvan ha sklaer o fal. Ne vefe nemet evit koust ar c'hoari bezañ koll bep tro eus an daou du...

Lavaret eo bet ne oa ket blaz pal an Emsav-a-viskoazh gant listennoù "Pobl Breizh, ur Bobl en Europa". Na gant re ar CRB kennebeut aval-just. Hag e oa tu zoken da gavout mennoziù tost d'hor re gant kinnigoù listennoù 'zo, ar re c'hlas en o zouez. Hag a zo gwir. Met ret mat kompren n'eus ken eus an Emsav-a-viskoazh, pe n'eus bet biskoazh anezhañ kentoc'h. Ar pezh a zo eo istor an Emsav an hini eo, gant e labour don, dalc'hus, dibleg, ur skouer evit an emsaverien; hag ivez gant e fazioù, e c'hwitadennoù, kozh pe nevesoc'h, hag a ro dimp danvez da brederiñ diwar o fenn evit hol labour a-vremañ. Hag emañ gant amañ.

Abegoù ur c'hwitadenn

Marteze, dre forzh klask pagañ ouzh mennoziù pennañ ar gevredigezh, e vefomp deuet da vont d'he heul, ha n'eo ken araoki evel ma terefe marteze da strolladoù o c'hoan e-maez ar jeu ofisiel? Pe ar c'hontrol, ne vefomp ket aet don a-walc'h er jeu ofisiel-se evit tizhout un niver a vouezhierien e feur gant levezon gwirion an Emsav? Setu aze ur gudenn all.

Tu a zo bet ivez da vuzuliañ efed ar strolladoù gant ar c'hantonaloù: disoc'hoù etre 1,67 ha 7,97% gant an emsaverien rik, met war-dro 10% pe zoken tost da 30% pa 'z eus bet tu evit emsaverien anavezet mat en o c'hom-bro da vont d'ar c'hantonaloù war o anv o-unan. Petra soñjal eus kement-mañ? Daoust ha distiz a vefe gant an dud ouzh mennoziù an Emsav ofisiel, ha fiziñs en aneb evit an emsaver o-unan-penn anavezet war an dachenn? Lakomp e vefe eus ar martezad-se ur fed testaniakaet diavar. Achanta, tennañ da anataat daou dra a rafe se: Da gentañ, gant an dud - pe ar strolladoù - anavezet an hini eo ez afe kentoc'h ar mouezhioù, ha n'eo ket gant ar strolladoù o c'hinnigoù fin. Luskenn ar surentez an hini eo a gaver amañ. Bez' ez eus kalz muioc'h a dud trubuilhet - dic'houzvez dezho - gant riskl digempennadurezh ar mennoziù nevez eget didennet ganto. Hag ar mennoziù nevez a gumst bezañ re tud eveldomp, dianavez.

Evit mont war-raok

Ret bezañ anavezet eta. Evit un den e-unan bezañ anavezet a zo un afer a dachenn lec'hel, hag a labour padus. Evit ur strollad un afer a vro en he fezh. Hag amañ avat e vez ret neuze sammañ ul labour pouezus a vruderezh, ha bruderezh mat, aozet pizh diouzh ar c'hudennoù, o klotañ gant mennoziù don ar brasañ eus ar vouezhierien. Ar mediaoù an hini eo a zo ar binvioù nemeto da vezañ implijet evit dont a-benn da dizhout ar pal-se. Penaos? Gant pegement a dud, libr eus o amzer evit kempenn ul labour a-seurt-se? Gant pe yalc'had a arc'hant evit ober war-dro ul labour dibouez? Ul labour anvet e saozneg "public relations", maget brav gant an embregerezhioù bras... hag ar strolladoù gall.

D'an eil, mediaoù pe get, ret mat e vefe

ivez kompren luskennoù don an dud. Asoch' avat lamall dezho emañ eus an tu fall. O klask lakad an dud da vouezhiañ evit "Ecologie, développement, solidarité" ez eus bet graet ganimp ur c'hementad brav a vruderezh evit ar mennoziù-se, met daoust hag ar mennoziù-se a oa ar re o kenglotañ ar gwellañ gant luskennoù don ar brasañ eus ar vouezhierien? Hag un dra all: bep tro ma vez goulet diganto mont da reiñ o ali e burev ar mouezhiadur, petra a vez e gwirionez an dud dre vras oc'h ober? Dic'hoantañ o luskennoù! Hen ober a reont avat en ur skarzhañ kuit listenn-mañ-listenn, re diouzh an tu kleiz, re diouzh an tu dehou, kuit a brederiñ don diwar-benn ar c'hinnigoù brav-kenañ savet evito eus pep perzh. Luskenn ar surentez ur wech ouzhpenn...

N'eus ket kement-se a dud, a-benn ar fin, evit bezañ prederiet gant un dibab gwirvoudel eus ar gallustedoù kinniget dezho gant ar strolladoù. Ar santadur an hini a drec'h, istor mennoziù kentañ yaouankiz pep hini, sanket e donder e galon...

Setu perak ar c'hlas pakañ 5 pe 8% eus ar mouezhioù hep re a zale a zo dija anezhañ ur pal silius. Rak kement-se a ra marteze ar c'hald pe an d'ederenn eus ar mouezhioù "dieud", ar re n'int ket etret da vat gant meizframmoù gall kleiz/dehou, lik'libr, ruz/gwenn, gall. Petra c'hoazh evit echuiñ gant an notannoù-mañ? Ur gudenn bouezus a zo da vezañ diskoulmet, ha d'am soñj n'eo ket klask sevel mennoziù mat evit an dud a vo d'ober, met kentoc'h klask labourat e donder ar gevredigezh evel un elfenn gwirvoudel hag efedus eus he buhez pemdeziek. Startoc'h hen ober eget hel larout, gouzout a ran. Met petra fell dimp... ■

Skudenn diavaez an Emsav

C'hwervoni

An holl re hag o deus peget skritelloù pe o deus skignet traktoù e-pad mare an dilennadegoù, an holl re o deus lakaat o fiziñs e-barzh al listennoù breizhek a zo c'hwerv o c'halon sur a-walc'h pa welont pegen treut eo bet an disoc'hoù.

Treuzvarnoù

Pa gomzer ouzh tud hag a zo er-maez eus an Emsav e c'heller gwelst pegen fall eo skudenn diavaez an Emsav. Treuzvarnoù a zeu atav war beg o zeed. Bez' e c'heller lakaat anezho e-barzh pevar rummad. Da gentañ ez eus an dud kozh hag a soñj dezho c'hoazh ez eo an emsaverien penñhêred da "Vreizh Atav", da lavaret eo d'ar re hag a oa a-dugant an Alamanned e-pad ar brezel (hervezo). Bihan eo o niver avat bremañ dre ma steuz o rummad-oad. D'an eil ez eus an dud a oad etre hag a soñj dezho ez int "babakouled" fagodenet ha gant blev hir ha lous warno.

An dud dre vras ne ouzont ket (ha zoken e Breizh) ha na gomprenont ket talvoudedezh ar rannvro er vuhez sokial. Setu petra a vefe paliou ar stourm o tont. Bez' e c'heller krouñ micherioù nevez dre ar rannvro. Dre ar C'huzul Rannvro e c'heller lakaat an deskadurezh da glotañ ouzh ezhommoù ekonomikel ha sevenadurel pep rannvro. Da lavaret eo e tleomp komz diwar-benn traoù fetis o touchañ buhez pemdezikel an dud ha dav eo dimp leuskel a-gostez an "dogmoù" kozh hag a spont an dud pe a lez anezho diseblant.

Echu eo gant Pobl Breizh...

Ar Vretoned na stummont mui ur vroad evel ma ra ar Skoziz pe ar Gembreiz, rak kollet o deus bet o emskiant a bobl. Evit bezañ Breizhat e ranker gouzout istor Breizh pe he yezh. Ar pep brasañ eus hor c'henvroidi n'o deus klevet morse komz diwar-benn mammenn hor gwirziñnoù. Hor gwirvoud dimp na glot ket gant o hini. Maget int bet gant talvoudoù Bro-C'hall. Setu perak ez eo ken pouezus ha talvoudus an emgann evit an deskadurezh. Pa vo desket hon istor, hor yezh, hol lennegezh er skol en un doare deraet e cheñcho an dud sur a-walc'h.

Met dav eo dimp astenn an dachenn stourm. An emgann evit ar yezh n'eo ket a-walc'h. E Breizh-Uhel da skwer, ne vo biken un niver bras a dud o pleustriñ war ar brezhoneg. An emskiant a bobl a ziwan dre an Istor ha dre al lennegezh vreizhek e galleg el lodenn-mañ eus Breizh. Ha perak pas neuze krouñ ur gell o tastum kelennerien war an istor hag ar galleg emren met staget ouzh an UGB evit ma vefe desket an daou zavez pouezus-mañ e Breizh?

Deut d'ho oad gour, ne fall ket deoc'h cheñch ho menoz. Setu ar pezh a zo erruet e-pad mare an dilennadegoù. Votañ a ra an dud alies ivez kentoc'h evit un den eget evit ur menoz. D'am soñj, n'eus ket a "leaderien" a-walc'h e-barzh an emsav evit ar mare. Tud gant personelezhioù kreñv, tud "vediatek", barrek da gendrec'hiñ an dud. Un arz eo ar politikerezh e gwirionez. Evit komz dirak an dud e ranker kaout anaoudezhioù don ha solid, e tleer bezañ barrek da respont da nousep goulen... Mat e vefe ober kentelioù evit ar re hag o dele c'hoant d'en em lakaat e-barzh ar politikerezh...

Siou aes kaout an dizober anezho

Kiañv eo an Emsav gant siou hag a zo aes da bareañ. An dizurzh o vevañ an hini kentañ. Dalc'het 'm eus soñj eus ur vanifestadeg hag a oa bet e Roazhon warlene. Bez' e oa tud o c'hortoz en ul lec'h, tra ma oa tud all ouzh o c'hortoz en ul lec'h all ! Souden-doue e teuas ur bagad tud all o huchal sloganoù feuls a-enep d'ar Stad C'hall ha d'ar CRSed. Da betra? Hag ar Roazhoniz a oa o vale war o fouezig ken diseblant ha tra! Kazi den ebet ne glaskas komz out ! War blasenn ar ripibik e oa bodet an emsaverien e-barzh ur c'helc'h enk tra ma oa an dud o tremen e-biou ken diseblant ha tra. Seurt tra na dalv da netra ! Pe... da vrasaat skudenn diavaez fall an Emsav !

Penaos kenderc'hiñ an dud ? Penaos kelaouiñ anezho ? Penaos lakaat anezho da grediñ ez eo talvoudus anezho ar rannvro en o buhez ? Penaos hoalañ an dud yaouank ? Mar fell deomp trec'hiñ an rankomp cheñch hon doareoù. Pep tra a zo pouezus e gwirionez. A rak sevel un trakt, e ranker prederiañ ouzh ster ha levezon ar genoù lakaet e-barzh. A rak moulañ ur skriteil e ranker prederiañ diwar-benn he liv hag he ment... Pa vezomp vanifestiñ e Roazhon da skwer e tleomp gouzout e vez dedennet an dud yaouank gant ar sonerezh rock ha n'eo ket gant ar c'han ha diskan...

An dizurvaniezh eo an eil si. Pet gwec'h em eus klevet an dud evit : "dizurvan eo ar Vretoned". Emañ pep strollad breizhek o vont gant e hent, kalunet e-barzh e zogmoù... ha pet a villanted a zo e-barzh pep hini ? ... Ur c'hant anezho emichañs Na pebezh farsite eo e gwirionez sed aze un dra vat evit ar galloud kreiz : "ret eo dispartiañ evit ren" Spi a zo annon e vo krouet ur strollad bras tuchantik diazezet war menzioù eeun hag aes da dizhout. Rak karout a reomp holl an hevelep verc'h, ka ?



Dav eo dimp ivez, a gav din, stardañ liammoù kreñvoch gant pobloù bihan Frañs. Emaomp dindañ gwesk an hevelep mestr hag amaomp holl o c'houzañv diwar an hevelep panoiou ! Ma vefe savet hor mouezhioù a-uvouezh e vefe edufedus'h diskoulm hor stourmoù. Ma vefe aozet manifestadegoù a-gevret e Pariz pe e Bruksel ne vefe ket ar Stad-C'hall an he bleud. Ur wech c'hoazh ez eo diaes deomp diskoulmañ hor c'hudennoù evel m'emaomp war hon-unan. N'eus ket ur breur henañ o tiwall ouzhomp hag o pourchas deomp dafarioù evit hor skolioù.

Arabat kontañ betek re war ar Galtad tramor, a gav din. Ma vefe Bro-Skos dieub da skwer, ez ardardie liammoù kentoc'h gant Bro-C'hall eget gant Breizh, en anv an "auld alliance" pa oa ar Frañsizien o stourm asambles gant ar Skoziz a-enep d'ar Saozon. Trapet eo Bro-Iwerzhon ivez, o vezañ ma'z eo staget hec'h ekonomiezh ouzh hini Bro-Saoz, N'eus nemet ar Gembreiz hag a c'helle sikour ac'hanomp d'am menno.

Europa war hor sikour

Ne reomp ket a-walc'h gant an "arm europat" ivez. Bez' ez eus tud en Europ hag a zo dudiet kalz gant ar sevenadur keltiek (an Italianed hag Alamanned da skwer). Pa oan e Praha da vare

Berr-Ha-Berr

Petra bennak ma'z eo bet anvet Jack Lang ministr an Deskadurezh C'hall eo chomet ivez ministr ar Sevenadur Gallamerikan en ur gouarnamant "sokialour" en deus skoazellat kevalaourion ar Stadoù Unanet da ziazezañ o Disneyland en Europa. Ur mell lamm war-raok evit ar Sevenadur Gall er bed, pe un disklariadur gwazoniezh ? Abaoe pell zo emañ "re roz" ar vro o lipat botoù Uncle Sam, ken e oa un drezeg gwelout Lang c'hoari giv ur bugel gant al "Lejion Enor" en doa bet c'hoant reiñ d'ar paotr Rambo. Petra ne rafed ket evit kaout allazig gant ur marmous meur. Envel a ray Jack Lang un Aotrou Glad ar Mor. N'ouzer ket piv e vo c'hoazh. Kinig a reomp da Jakig envel un Intron en e lec'h : Naig Rozmor, gant hec'h anv, ne c'hallfe nemet ober barzh. Siwazh n'eo ket anavezet ar brezhoneg gant ministrerezhioù Lang. Rak a-hend-all, sur, e vefe bet laketa dimp un Aotrou ar brezhoneg. Sur-mat e vefe bet kavet tud e-leiz prest da vout "aotrounezet". Difannour ar gregach er skol eo Jean Edern Hallier Da-Stagañ, evel m'en doa disklariet d'ar Meurzh 14 a viz Ebrel e-barzh FR3. Evel m'en deus lavaret e rafet un embannadur eus e gelaouenn "L'Idiot International" ("L'Idiot Breton", e vo sell aze a vefe un anv brav !), e vo marvat pennadoù gregach e-barzh, e-kichen ar pennadoù brezhonek. Ha setu, kavet hon eus piv a zlefe bout anvet an Aotrou Brezhoneg. M.K.

KAZETENNOU BREIZH

L'Avenir de la Bretagne (POBL) 150L/bloaz BP 4103 - 22041 Sant Brieg Cedex 2

Combat Breton (Emgann) 150L/bloaz BP 71 - 22202 Gwangamp Cedex

Le Peuple Breton (UDEB) 160L/bloaz BP 301 - 22304 Lannuon Cedex

Armor magazine 225L/bloaz Pont Sant Jakez BP 419 22404 Lambal Cedex

J.E. Mouton

Kreskiñ ha diorren an eskemmoù

Ur rouedad Tiez ar Vro



Ur pennad amzer zo dija, ez eus tud un tammig e pep lec'h o prederiñ evit kreskiñ ha diorren an eskemmoù etre kumuniezhoù disheñvel Europa. Divizet ez eus bet gant un nebaud okitaned pennek ha kalonek, kas da benn ur raktres europat Tiez ar Vro.

Petra eo "Ti ar Vro"
Ma soñj tud zo e servijont dija ur gumuniezh yezhel pe sevenadurel, hep Stad pe en un degouezh minorelaet ez eus tu dezho da zont da vezañ un "Ti ar Vro". Da gentañ penn e vo an tiez-se kreizennoù kelaouiñ gouest da respont, eeun pe c'heun, d'an holl pe d'un nebeud goullennoù a-zivout : an degemer er vro, an eskemmoù, ar stummadur, an amzer vak, an douristelezh h.a...

c'hellfe bezañ krouet. "Tiez ar Vro" o deus evel pal ivez bezañ ul lec'h kejañ, pe gwelloc'h c'hoazh kenlabour evit an aozadurioù hag a labour war dachenn ar yezh hag ar sevenadur.
Piv a c'hell kemer e karg un "Ti ar Vro" Pep ti zo "emren" evel just, meret gant an dud e karg kenkoulz evit an arc'hant hag an obererezh. Trawalc'h e vo da renezh an aozadur bezañ a-du gant "Chart Europat Tiez ar Vro", a vo savet gant an holl prest da grouiñ ar rouedad, evit dont da vezañ unan diouti. Ar pezh a vez ret, avat, eo diskouez (er pleustr) e pleder gant yezh ha sevenadur ar vro.
Meret e c'hell bezañ "Ti ar Vro" gant ur gevredigezh publik pe brevez (mirdi, titouri, aozadur sevenadurel, ti-kêr...) pe c'hoazh gant tud o unan, perc'henn war an ti hag an douaroù, evel ar beizanted da skouer.
"Ti ar Vro" a c'hell ivez bezañ e diabarzh ur framm all, gant ma vo evel-just palioù an aozadur-mañ, o klotañ gant ar "chart", da skouer, live herberc'h.

Tiez ar Vro e Breizh
Tu vefe eta da gaout e Breizh, meur a "Ti ar Vro" o kemer perzh er raktres-se. Trawalc'h e vefe studiañ ar pezh a zo buhezek dija e bro Glazik, Vigouden, Goulo... Ur wech renablat ar frammoù o plediñ gant an douristelezh, an degemer tud... e vefe tu da ginnig dezho labourat ivez war tachenn ar yezh hag ar sevenadur. Rak, da ziwall zo e vefe krouet "Tiez ar Vro" nevez-flamm, o tremen hebiou ur bern traoù staliet dija hag a vefe pouezus kas war an hent-se.
Pal kentañ ar c'homite Okitan a zo skoulmañ ar muiañ ar gwellañ a zarempredoù gant tud hag aozadurioù dedennet da sevel Europa war diazezoù gwiriou.
A.V.C.
• Comité d'initiative pour une fédération Européenne des Maisons de Pays. Marcel Mouatront. 11, allée Dolce Famiente 06110 Le Cannet.

Saotradur ofisiel

Lastez Nukleel e Breizh



Manifestadeg an 11 a viz Ebrel (Luchskouenn gant un emsavorez)

E miz Kerzu diwezhañ e oa bet klevet Jacques Fauchoux, maer PS Foujera, oc'h embann e oa kaoz da sevel ul labourva dandour da imbouchañ war al lastez nukleel. Hogen netra danjerus, emezañ, ha n'eo ket evit-se e vefe degemeret latez nukleel er vro.
D'an 31 a viz Meurzh e tisplege prefed Roazhon e vefe berniet al lastez e

kompezenn maen-greunek Landean, en hanternoz kêr Foujera.
1200 a dud a oa e straedoù Foujera d'ar Sadorn 11 a viz Ebrel o vanifestiñ a-enep d'ar raktres. Ar Re C'hlas ha dilennidi (eus an tu dehou dreist-holl) a oa o kas an traoù. *Pelac'h e oa an Emsav ?*

M.K.

Diskouezadeg etiketennoù ha madoù katalan kinniget gant A.D.E.C. e Ti-Kêr Roazhon !

A.D.E.C. (Kevredigezh Difenn an Etiketennoù e Katalaneg) a zo bet krouet e-sell broudañ an embregerezhioù katalan da skrivañ liketennoù o frodiou e yezh ar vro.
Difennet e oa groñs embann hag ober bruderezh e katalaneg e-pad 40 bloavezh a zikataouriezh Franco (ha difennet ouz ar c'hatalaniz komz o yezh e lec'hioù foran zoken).
Goude an tremen d'an damokratelezh ha bezañ diazezet ar broioù emren, he deus Katalunia adaptet tamm ha tamm hec'h holl c'halloudoù kent : kalennadurzh ar c'hatalaneg, eus ar skol-vamm d'ar skol-veur, kazetennoù, skingomzioù ha skinweliou e katalaneg, h.a.
Hogen boazet e chome meur a embregerezhioù katalan o liketennoù o frodiou e kastilianeg ; da stourm ouzh kement-mañ eo bet savet A.D.E.C. gant yezhgarourien.
Anvaz a ra A.D.E.C. eo bet entanet renieren an industriezhioù katalan gant ar menoz, ha niverus int d'an deiz a hiziv oc'h embann etiketennoù divyezhek ■

Keleier Breizh
"Kelaouenn"
36 15 KELA
war skramm ho minitel !

Barnedigezh ar PTT
Renerezhioù ar Postoù 29 ha 44 o deus embannet ne oant ket rediet da gas d'an dud al lizheroù skrivet warno ur c'holmec'h e brezhoneg. Skoazell ar C'huzul-Stad o deus bet.
Kuzul Ar Brezhoneg a zo o vont da c'houlenn ali Renerezh Rannvro Ar Postoù. Ma sav hemañ a-du gant ar Renerezhioù- Departamant 29 ha 44 e c'houlenno KAB gant e izili klozañ o c'hontoù CCP.
Kondaonet gant Israel
Ur barzh israelian a zo bet barnet ha kondaonet da 18 miz toull-bac'h gant gourez ha 170 000 lur tell-gastiz evit bezañ savet hag embannet ur barzhoneg diwar-benn an Intifada. Meuleudi a rae d'ar foulster, sañset ...

Sklaved e 1992
"100 milion a dud zo dalc'het er stad a sklavelezh ar bad !" a gemenn ar gelaouenn amerikan "Newsweek", hag eveljust ul lod vras eus ar broioù-se o deus sinet "Diskleriadur Gwiriou Mab Den" e 1948 ...


Ur gevredigezh nevez, "Pêr Gwilhmod, Roue Begnen" a zo paeuz prenañ rivoù an ti m'eo ganet ennañ Pêr Gwilhmod, e Kerdal, war barrez Begnen, dres war vevenn ar brezhoneg. Pêr Gwilhmod a oa unan eus ofisierien anavezetañ Jorj Kadoulad, a gabestras ul lodenn vras eus bro-Wened e-pad bloavezhioù. P'en em savas gant ar genvroiz ha pa voe fuzuilhet war ar warrem e Gwened edo b'pred an hevelep ger-stur gantañ : "D'an d'oberenn am eus c'hoant da gaout ar gwir da vont".
Emañ ar gevredigezh-se e soñj adseval an ti, gant arc'hant ha ... daouarn hec'h izili. Prevez a-grenn eo, an izili anezhi. Servijout a raio an ti goude-se da zerc'hel koun eus ar prantad skrijus-mañ, hag enorus-murberd ivez, eus istor hor bro. 100 lur eo ar skodenn v'ioaz emezallañ. Skrivañ da sez ar gevredigezh "Pêr GWILHMOD, Roue Begnen Al Llaou, 29 120 ST YANN TROLIMON".

Gwareziñ ar minorelezhioù

Daouzek yezh ofisiel e bro Italia

gant Aline Gleoneg

E ladineg, e galleg-provañseg, e vo dalc'het hizviziken en Italia kuzulioù an tiez-kêr, e gresianeg pe en albaneg e vo bodet kuzulioù-merañ ar skolioù, e sardeg hag e friouleg e vo embannet dielloù ofisiel ar riez.



Gwir-ell yezhoù

E gwirionez, dre deurel ur sell war tachenad pep yezh rannvroel, e teu anat ne vo nemet div anezho hag a zeulo da vezañ gwir-ell-yezhoù : ar Sardeg hag ar Friouleg e vo. Gant ar mellad 8 ez eo anavezet implij ar yezhoù rannvroel en holl melestradurioù, met dre gomz hepken (nemet ar barnerezh ma vo graet dre ret gant an italianeg hepken). E pep kumun e vo abezet an traoù : Evit kaout an dezvad ofisiel a vinorelezh e vo ret d'ur strollad tud bodañ d'an nebeutañ 15% eus annezidi ar gumun. Bez' e c'hello ivez pep kumun ledanaat

arveradur an danvez-lezenn war an tachennoù bet lezet e dalc'h ganti, war tachenenn an deskadurezh da skouer : Nauze e bro Sardegna e vo tu da lakaat ar Sardeg da zavez ret er skolioù-meur rannvroel. Ar gwir o devo ar c'humunioù da embann diwar o c'hous touladoù ofisiel ar riez ar yezhoù rannvroel ; met a-fed lezenn ne dalvez nemet an destenn en italianeg : ne c'hell ket ar geodadiz en em harpañ war an droidigezh evit sevel klamm pe goulenn groñs tra-mañ-dra. Keleier ar yezhoù rannvroel a vo skignet e programmoù ar RAI-TV

(Radio Televisione Italiana) ; anvioù kozh ar ruioù, ar bourc'hadennoù hag ar c'hêrioù a vo adlakaet war ar panelloù-heñchañ e-kichen an anvioù en italianeg, daskoret e vo o stumm a-orin d'an anvioù-familh bet italianekaet. A-bep seurt mennozioù ' zo bet eztaolet a-zivout al lezenn nevez : derc'hour ar votadeg o doa kaset pemp kerdour brudet ul lizher digor da Craxi (Sekretour ar Partito socialista italiano anezhañ) ha da Occhetto (Sekretour ar Partito comunista) evit aspediñ da votiñ a-aneb un destenn a lakafe en arvar, hervez, unvaniezh politikel ha sevenadur ar vro. Bez' 'ez eus tud ivez o deus aon e rofe al lezenn un harp dic'hortoz d'al lezhe⁽¹⁾ (ar c'hevreoù) ha dreist-holl d'ar c'hevre lombard, a zo kreff d'ia e levezon. Aon o deus ouzhpenn e teufe spered an dud da vezañ bouzar ouzh kement kloc'h ne vefe ket hini tour o iliz : ra steuzio holl hellenegerien ar Puglia, a huchont, gant ma vo savet unvaniezh sevenadur ar vro.

Lod all a zo disheñvel o soñj : Luigi Marco Lombardi Satriani, tudonour e Roma anezhañ, en deus savet e vouezh evit difenn al lezenn ; setu amañ da-heul ar pezh en deus diskleriet : "Didalvez e chomo kement lezenn a vo votet keit ha ma ne vo ket imboudet e spered an dud ur gwir zoujañs evit ar sevenadurezhioù liesseurt a vez en ur vro. Ur fazi bras eo komz diwar-benn ur sevenadur italian univ hag unvan, en ur vouchañ ar sevenadurezhioù rannvroel a ra aus Italia ur vro marellet, liesstum ha liesyezh. Forzh penaos, a-ziwar an disheñvelerioù e vo lakaet war sav ar gwir unvaniezh a zo hetet gant an holl Italianiz." ■

(1) Le lezhe : ar c'hevreoù ; luskadoù autonomist, kentoc'h eus an tu dehoù. An hini c'hevreañ eo ar c'hevre lombard. (Troet diwar ur pennad gant Paolo Conti embannet er Corriere della Sera mi Kerzu 1991)

N.B.

1) Da-geñver votadeg an danvez-lezenn eo bet embannet an niver eus an dud a ra gant ar yezhoù estren :

- Albaneg : 80.000
- Katalaneg : 15.000
- Friouleg : 700.000
- Gresianeg : 20.000
- Ladineg : 30.000
- Okitaneg : 100.000
- Kroateg : 70.000
- Serbo-Kroateg : 4000
- Alamaneg : 300.000
- Tziganeg : 50.000
- Sardeg : 1.650.000

2) Ouzhpenn ar yezhoù estren a denn an danvez-lezenn dezho, ez eus e pep rannvro eus Italia rannyezhoù hag a zo evit ur benn tud yezh ar pemdez : ar piemonteg, an napolitanez, an abruzeg, ar venezianeg, ar c'halabreg, ar romagnoleg (yezh Fellini hag e-senarist Tonino Guerra) hag all...

Yezh ar Pemdez eo ar rann-yezhoù ; yezh al lennegezh ez int ivez : en 18vet kantved en doa skrivet Goldoni e bezhoù-c'hoari ken brudet e venezianeg ; en XXvet kantved o deus skrivet Pasolini ha Tonino Guerra o barzhonegoù e romaneg, ha Gadda, romantour anezhañ, en deus savet ur romant polis ha faltazi war un dro en ur veskañ meur ar rannyezh hervez an tudennoù. (Quer pasticciaccio brutto de via Merulana : na spontusant imbrogio e ru ar mouik'hi !)

Arabat disoñjal ne oa e 1861 (da vare an unvanidigezh) nemet 2% eus ar boblañs o'h ober gant an italianeg en Italia. Hiriv an deiz e kred Cossiga, prezidant ar Republik anezhañ diskleriañ : "A-orin on eus ur familh sard, autonomist ha frañmason" (le Monde, 13 a viz Du 1991). Lavaret ez eus bet din memestra n'emañ ket an holl italianiz a-du gant diskleradurioù a-seurt-se.

Taol-pluenn d'ar sonerezh Hard-Rok gant Yann Mangwenn

E-barzh ar gazelen "Libération" nevez 'zo ez eus bet embannet ur pennad-kaoz gant Eric Clapton, ar c'hoariar gitar d'edon brudet. Bugel bastard dilzelet gant e vamm ha desavet gant e vamm-gez, Eric Clapton a zo abaoe pall mignon d'an Ankou ha d'e verc'h an digenvezded : diwar denañ an divronn-se en deus kavet awen e sonerezh blues, evel m'en diskouez anat e vuhez. Dimezet ha torr-dimezet gant gwreg e vignon gwellañ Patti Layla Harrison e vez bramañ e-unan adarre en e garr-tan diouzh an noz o listreñ d'ar gêr war-lerc'h e abadennoù Rock brudet-bras. Drebant eo deuet da vezañ war a lavar, met diaes eo da unan chom hep merout falc'h an Ankou o'h ober e labour en-dro dezhañ : Keith Relf, kaner ar Yardbirds a zo bet tredanael ; Brian Jones, eñ, a zo bet bezuet. Boaz eo oa Eric Clapton da vont gantañ da selau e vignon all Jimi Hendrix a zo marvet mouget (en e zistonkadurioù, soñjit 'ta !). E lerc'hiader e strollad ar Bluesbreakers, Peter Green a zo...

...dianket ! Duane Allman e genel, triket. An toumpet Jim Gordon a vo bac'het betek e dremenav goude bezañ lazhet e vamm a daolioù bouc'hal. Jesse Ed Davis, kompagnun Friends Delaney and Bonnie ; marvet dre over-dose. Freddie King : taol gwad. Carl Radle, e voutour lea : kollet en deus e vuhez gant an alkohol. John Lennon, ma savas gantañ ar Plastic Ono Band, a voe drouklazhet. Richard Manuel ur mignon all, en deus echuet ouzh ar groug. Stevie Ray Vaughan : skarbotet en ur gwallzarvoud askellfroez, prestik goude ur «Jam» a-gevret gant Eric Clapton. Ha Last but not least (da ziwec'hañ ha n'eo ket an hini diwezhañ...), Connor e vab, difrenestret e Manhattan, a-ziwar ar pemont trivet solier, diouzh ranni e vamm, ar jakedenn italiat Lori del Santo... Doue d'o fardono !!! Dres a-walc'h, o'h echuiñ e komz Eric Clapton diwar-benn Doue : "Diass-bras eo derc'hal da vezañ pa 'z eur bet unan eus ar Beatles, p'en deus unan kredet eod Doue, zokan ur monedig-pad hepken".



Nukleel

Tchernobyl dindan ar mor

Da belec'h e vez kaset al listri-spluj nukleel pa reont peñse ? Da strad ar mor, gant ar re all. Nemet e laoskont da verañ ur vammenn a skinoberiusted, ouzhpenn an hini a zeu eus ar bombez hag ar banneloù kollet, hep komz eus ar pipoù skinoberius darc'haouet er mor gant un dousenn vroioù abaoe 36 vloaz, ha gant Bro-Saoz da gentañ-penn.

510 lestr-spluj nukleel a vez o neual dindan morioù ar blanedenn. 65 lestr morlu ha 10 lestr all a ra gant an dazloc'h nukleel. An 10-se n'o deus nemet un dazloc'her nukleel pe zaou, met an holl re all a vez armoù nukleel, bombez pe vannelloù, war o bourzhioù.

Pan a ul lestr d'ar strad, gant e gargad pe hepti, grik ebet gant ar pennadurezhioù. Pa vez kollet un arm e-kerz un embregadenn, heñvel dra. Nac'h da gentañ a ra ar gouarnamantoù. Pa vez stank ar prouennoù e teurvezont anzav neuze ez eus bet tennet ur vannell "dizarmet" bennak. N'eus nemet Yannig kaezh a vez touellet gant ar c'hornzou kaer-se, rak polisoù kuzh an holl stadoù a car mat-tre petra zo choavezet ervat. E-touez an holl listri-spluj aet d'ar strad ez eus lod zo bet kaset di a-benn-kaer. Digoust e vez en em zizober evel-se eus kozh batimantoù diamzeriet. Sed a oa mannozh morlu Amerika, evit al listri a oa da vezañ distrujet etre 1982 ha 2012.

Klasket ez eus bet niveriñ ar gwallzarvoudoù ar seurt-se evit ar wech kentañ gant tud ar Gwazadur Etrevoudel evit ar Gremm Atomek e Wien, a-benn ar c'hendalc'h Etrevoudel war saotradur ar mor a oa bet bodet e Londrez e miz Du 1991. 31 gwallzarvoud zo bet kavet ganto, 16 anezho n'int ket bet anzavet gant ar stadoù kablus. Ha muioc'h zo bet marvat ! Pegement a armoù nukleel a oa e kont n'ouzer ket c'hoazh, na peseurt armoù a oa ken nebeut all. Pennoù nukleel bannelloù a oa anezho peurvuiañ.

Listri hag all

Ar Stadoù Unanet eo a zo kiriek d'ar braz eus ar c'holloù (18 diwar 31), dre ma'z int perc'henn d'ar brasañ bern er



bed. ar Soviediz, a car level gwelloc'h eget an Amerikaned, n'o defe anzavet nemet 9 gwallzarvoud, 7 anezho gant listri-spluj.

Ouzhpenn listri avat zo. D'an 21 a viz Genver 1968, pa freuzas ur c'harr-nil B-52 war ar vorskorneg nepell diouzh Enez Thule, er Groenland, e torras ar peder bombezenn a oa gantañ ha strewet e voe an danvez skinoberius, plutonium dreist-holl, betek war-hed 50 kilometr tro-war-dro, ha kontammet ar mor. Ankounac'haet pell zo ar gwallzarvoud, hollbadus avat an efedoù.

A-wechoù all e vez ul loarell warni un dazloc'her nukleel a guita he c'hialc'hroad da zistreiñ war an Douar, pe da gouezhañ er mor kentoc'h, pa'z eo 8 gwech bihanoc'h gorread an

douaroù eget hini ar morioù. Aner lavarout ned eor ket da glask pesketa an ardivinkioù-se, pe dre ma'z int kouezhet re zon. Emañ ar Rused o klask distradañ unan eus o listri-spluj, ar c'homsomolats, peñset e mor an Hantemoz, dirak adoù Norg, abaoe ar 7 a viz Ebrel 1989, gant bannelloù war e vourzh. Barzañ ar besketezh en-dro d'an takad-hont en deus graet gouarnamant Norge, rak prouet ez eus bet e fue an dazloc'her hag e oa krog ar mor, buanoc'h eget na c'hortozed, da grignat ar pennoù nukleel.

Milionoù a vilardoù a vakereleù eta a zo solet e goueled ar morioù, meur a wech ar c'hementad distaollet en aergelc'h goude gwallzarvoud Tchernobyl.

Darc'haouiñ dilerc'hiadennoù nukleel Ar skinoberiusted-se a zeu ouzhpenn an hini darc'haouet a-benn-kaer gant un toullad stadoù, Bro-Saoz da gentañ-penn, abaoe 36 vloaz bramañ, en un 50 takad bennak, evit en em zizober eus o lastez nukleel, dinoaz evel just, gouez dezho.

Ar c'hentañ dilestradegoù a-benn-kaer-se a voe graet e 1946, goude an eil brezel-bed. Lec'hioù eus ar Meurvor Habask, nepell diouzh aod Kalifornia, a oa bet dibabet gant an Amerikaned. An dilestradeg diwezhañ a voe e 1982 er Meurvor Atlantel, ur 1 000 kilometr bennak diouzh ar adoù gall. Paouzet ez eus bet gant ar seurt bannadurioù dindan gwask ar broioù amezek a enebe groñs. Rak betek-hen e oa aotreet ha reoliet kement-se gant an "Emglev evit enebiñ ouzh saotrezh ar mor", sinet e 1975 e Londrez. Kantmiliadoù a fustadoù lastez-gollet a dar pe a vill-raz, strollet e kambrou-enderc'hel, a zo aet da ziazezañ e strad ar mor. 10 pe 15 vloaz avat zo tra-walc'h d'an douar-mor da fregañ ar materi-se. Er penn-kentañ, zoken, e voe taollet al lastez hep bout pakel, a vardiadoù, en o stumm dourek meur a wech.


Piv ar saotrerian ? 12 bro zo. Darn anezho, evel Italia, Alamagn, Sveden, n'o deus felladennet nemet ur wech, ha n'o deus bannet nemet kementadoù bihan ar skinoberiusted anezho. Bro-C'hall, eus kreizenn La Hague, n'ha defe taollet nemet div wech, hogen kementadoù brasoc'h e oant. Mont a ra ar maout memes tra gant ar

Saozon, p'o deus taolet 80% eus ar skinoberiusted. Gant hon amezeien tramor ez eus bet taolet 75 000 a donennadoù lastez nukleel en ur 15 bennak a dakadoù eus ar Meurvor Atlantel. Kavet o deus, zo kaeroc'h, ul lec'h eus ar c'hentañ : ar mor e-tal la Hague. 15 gwech (ha 2 wech ar Velgiz d'o heul !) o deus taolet lastez etre 65 metrad ha 160 metrad donder. An dilestradegoù e-maez ar reol-se a zo lec'hiet resis e 49° 50' a ledred Norz ha 2° 18' a hedred Kormog, un 30 kilometr bennak eus aod Normandi. Mar deo uhel feur skinoberius ar c'hregin hag ar pesked eno n'eo ket labouradeg La Hague an hini zo kaoz penn-da-benn.

Skinoberius an dazont

En-dro d'ar bernioù lastez-se ez eus bet kavet feurioù uhel e geziom hag a uranium. En abeg da se an hini eo bet berzet ar seurt bannadegoù, en-ofisiel da vihanañ. Nevezik zo ez eus bet diskuliet gant un uhelgardard sovietek e oa bet taolet miliadoù a donennadoù lastez nukleel (pe greantel pe soudardel a orin), dazloc'her al lestr freuzer-skorn "Lenin" en o zouez, e mor Kara e Siberia.

N'eus ket bet lavaret ha paouezet e oa bet da deurel war ar bern : muioc'h pe nebeutoc'h, petra 'vern ? Hogen dañrusoc'h e vo c'hoazh an holl fustadoù-se pa zigorint. Rak digeriñ a raint. (Troet diwar pennad Jacqueline Denis-Lempereur, e "Science et Vie", Genver 1991 gant M.K.)



Loadenn pep bro e lastez nukleel taolet d'ar mor abaoe 36 bloaz

YEZH HA SEVENADUR

Emgavloù an nevez-amzer e Bro an Oriant

KAN AR BOBL 8 a viz Mae Tachenn Cosmao Dumanoir Sal ar Voustoer, Kompezenn ar 4 Avel.

STAJ BREZHONEG aozet gant Stumdi 11-15 a viz Mae Amzer Nevez.

SONADEG : Barzaz 16 Mae 9 eur noz Les Arcs.

SONADEG : Patrig Ewen 21 a viz Mae 10 eur mintin ha 3 eur goude lein. Les Arcs.

PREZEGENN : Trenioù bihan bro Vigouden gant Serge Duigou, aozet gant U.T.L. 21 Mae 2eur30 Ti ar C'hevredigezhioù.

PREZEGENN : Luderezh ha binvioù sonerezh e Breizh, gant Bernard Loffet ha Daniel Lafontaine, aozet gant U.P.B. 21 Mae 6 eur noz 21 kae an Indez.

PREZEGENN : ar Mabinogion gant Herve ak Bihan, aozet gant Armor Argoat 21 Mae 8eur30 noz 2 stradaed ar Volz.

DISKOUEZHADeg : binvioù sonerezh e Breizh, aozet gant U.P.B. 21 Mae 5 Mezheven 21 kae an Indez.

SONADEG : Gwenna 23 Mae 9 eur noz Amzer Nevez.

PREZEGENN : Ar porzhioù-bered gant M.Dilasser, aozet gant U.T.L. 4 Mezheven 2 eur 30 Ti ar C'hevredigezhioù.

KOROLLIES : Kevezadeg Breizh ar c'horoù hengounel hag arvestus, aozet gant Kendalc'h 7 Mezheven 10 eur mintin da 7 eur noz Les Arcs.

GOUEL AR VUGALE : aozet gant Emglev Bro an Oriant 9-10 Mezheven Amzer Nevez Kompezenn ar Pev ar Vev.

40 VET DEIZ-HA-BLOAZ BAGAD LANN-BIHOUe Sonadeg gant ar bagad ha kelc'h Boked er Lann, fest-noz 11-12-13 Mezheven, Ocaanis Amzer Nevez.

PREZEGENN : Marion ar Faoued, riblerezh pe vadobarouez ? gant Per Peron, aozet gant U.P.B. 18 a viz Mezheven 6 eur noz 21 kae an Indez.

GOUEL AR SONEREZH gant Storvan, Sonerion an Oriant, Dremwell, Kas a Barh, Dastumerion, etc... aozet gant Emglev Bro an Oriant d'an 20 a viz Mezheven adalek 7 eur noz Plasenn Aristide Briand.

Mont war-raok gant ar yezh

Implij an iwerzhoneg er c'hevredigezhioù

gant Alan Heusaff

En ur stagadenn d'ar gelaouenn bemdeziek, The Irish Times, embannet en hafn tremenet ha gouestlet d'an darempredoù etre kompagnunezhioù hag o arvalien, e lavared e oa implij an iwerzhoneg o vont war greskiñ er gevredigezh dre vras. Kalz tud o deus c'hoant da dec'hout diouzh unvander ar "sevenadur" angl-amerikat ha da dennañ splet eus ar pezh a ra Iwerzhoniz anezho en doare heverkañ. Gouzout a reont, evel ma'z eo bet diskouezet gant enklaskoù, ez eo troet-mat an darn vrasañ d'an iwerzhoneg, setu n'o deus ket mui ar re lent da zoujañ e ve graet goap anezho pa reont gantañ dirak an holl. E-pad re bell amzer ivez ne grede ket ar re a oa berr o anaoudegezh anezhañ pleustrif ar pezh a ouliant gant aon da dapout kentel diouzhtu digant ar re varrek... michañs en deus prenet ar rummad-mañ skiant ivez.

Ur c'hemm-emskiant zo eta e-keñver an iwerzhoneg A-du arall, ma sav tennarioù diwar bleustr an divyezhegezh, e kreder ez eus anezho mammannoù a nerzh, e vroudont zoken d'ar c'hrouñ war dachenn an arzoù hag oberioù all. Berwel eo ar re a gav dezho ez eo gonidusoc'h deskiñ yezhoù "bras" diwar goust deskiñ iwerzhoneg e-sell da vout barrekoc'h da genstrivañ gant ar pobloù all er Gumuniezh Europat. Ar pobloù-se ne groazont ket war o yezhoù-int. Disprizañ a raint ar re a zistaolo o hini met dougen a raint brî d'ar re a ray ganti evit ar vuhez a-vremañ.

Udarás na Gaeltachta, ar bennadurezh a zo he c'hefridi degas kompagnunezhioù da sevel stalioù-labour ha greantioù er Gouezelva, zo o reiñ harp da seveniñ un toullad steuñvioù hag a ra o mad eus donezonoù an dud yaouank ha pegen eus o ijin ha fallazi war dachenn ar c'hlevout-ha-gwelout. Spi en deus Ruan O Bric, pennverour an Udarás, e vo anataet e c'hall an iwerzhoneg mont a-gevret gant dioradur ar greanterezh hag e vo gonzet gant-se war an doare-gwelout nachus a vez intret gantañ spered ar ouezelegerien "hengounel" a-zivout o yezh, stag ma'z eo ar skeudenn anezhi ouzh hini an dilabour hag ar skorou-Stad a vevont diwarno evel pa vent klaskerien-vara.

E Dulenn, en un ti bras war leurgêr Muirfean, emañ annezet Bord na



Slourmerien ar yezh
Aoidan Mac Polan, Joyce Mac Carraigh, Seamus Mac Aleaven, Quintin Oliver ha Brendan Mac Ken

Gaeilge. Kefridi ar Burev-se eo kuzuliañ an ensavadurioù koulz hag a bep seurt kompagnunezhioù ha kevredigezhioù a-zivout an doareoù da lakaat ar yezh en implij. Kinniget en deus bet raklunioù munudek d'ar gouarnamant met kalz eus e erbedoù zo chomet war baper dre ziouer a archant d'o seveniñ. Digant ar Bord e c'hall ar re o deus c'hoant da ober gant an iwerzhoneg koulz ha gant ar saozneg en o embannoù kaout troidigezhioù mar karont.

Ali un den hag a ra micher eus ar bruderez-henwerzh eo e ranker teuler evezh bras o tibab gerioù ar pezh an arouezioù ouzh talbenn ar stalioù. Ret dezho bout aes da gompren, sklaer hag eun, ha diouzh ar skiant vat. N'eo ket emsav lakaat un droidigezh rik en iwerzhoneg eus ar pezh a vez disklêriet e saozneg : plas a vez kemeret evit nebeut a c'hoñd, gant ar stambouch e troer kuit ar sell. Ma c'haller reiñ un



tammig muloc'h da c'houtout gant an iwerzhoneg e vo gonzet. E-vel-se eo bet graet war dalbenn an ostaleri nepell diouzh Luimneach/Limerick : "BAR AND LOUNGE - cool agus OI". Hesonoù eo an iwerzhoneg. Kemenn a ra ez eus sonerezh (pezh na ra ket ar saozneg) koulz ha da evañ. Tu zo da danavaat ar stambouch ivez en ur ober gant livioù ha stummoù-lizherenn disheñvel.

Ober hep ar saozneg

Pe da ober hep ar saozneg, pa vez anavezat-mat an termenoù iwerzhonek. Da skouer "Fáilte" (donemat) ha zoken "Slán 'a bhaile" (kê dibistig d'ar gêr). E meur a lec'h ne vez nemet "fir" ha "Mná" war zorioù ar privezioù-kêr. Ma vefe c'hoant da spisaat e c'hallfed lakaat skeudennoù eus ur gwaz hag ur vaouez evel ma'z int anavezet e meur a vro. Meur a gompagnunezh, foran ha prevez, a ra bremañ gant an iwerzhoneg. CMP Dairies a embann : Tá ár mbainne in uachtar, pezh a zrevezfent gant "Hol laezh zo el laezh", met uachtar a dalvez "dienn" koulz ha "barr", "begenn". Ur marchadour glaoù : "Gual mar is dual", glaoù evel diouzh natur. Ur mouler : Sé clo ár ngno doiche is de lo", "moula eo hor micher noz-deiz". Gant ar c'hoari-gerioù hag ar c'hloiennoù e teu da vezañ dedennus.

Aer Lingus hag ivez British Midlands a zistag o lomaned un donemat d'o beajourien en div yezh ha goude d'o c'hiri-rij bezañ paret e trugarekaont anezho "en hevelep doare en ur hetin o deus bet plijadur gant o nijadenn. An darn vrasañ eus ar bankoù a vout karnedoù chekennoù ha follennoù-embannañ pe-vezankañ en iwerzhoneg, gant ma vint bet goulnennet. E mererezh-kreiz an talloù ez eus ur gverenn hag a

ra holl he labour dre ar yezh-se. Implijet e vez ivez e fakturannoù kompagnunezh an Tredan ha kompagnunezh ar Pellgomz. (houmañ ha deus roet ur yalc'had vrokus da aozerien an Oireachtas hevlene, pezh en deus douget d'ar berzh bras a zo bet graet gant goul-se ar sevenadur iwerzhonat e Cluain Dolcáin, ur vorchadenn hag a zo o reiñ ur skouer splann eus an adgouezelekaat, tre e-Kichen Dulenn). E Gaillimh/Galway n'eo ket dibaot klavout iwerzhoneg distaget-mat ar straedoù. Abaoe daou vloaz e striv ar gevredigezh "Gaillimh na gaeilge" da ober eus ar gêr-se unan divyezhek. Skozellet eo gant ar Skol-Veur ha gant ur poelliger arbennik savet gant ar Gambr-gerwerzh. Gwelout a reer kalzik arouezioù en iwerzhoneg war ar stalioù, an tavarnioù, h.a. A-du emañ ar strolladoù-sport, ar sindikadoù, ar skolioù, ar velien, evit kas ar strivadeg war-raok. E stalioù ha burevioù, evel e bankoù hag en tiez-post, e kemenn an implijidi : "Tá Gaeilge agam" (me 'oar iwerzhoneg). A-wachou eo lentoc'h ar c'hemenn : un tammig a ouzer ; tu 'zo da vouchañ an diviz hag e vo gwelot pegel e c'haller mont ganti.

E Corcaigh/Cork ez eur kroget gant ar gefridi diyezhekaat kêr ivez. Pádraig O'Quinnacháin zo karget eus an drase-gant Udarás na Gaeltachta ha harpet eo ivez gant ur gevredigezh nevez, Gael Taca. Kredif a ra Pádraig e talvez ober gant doareoù ar marc'had : bountañ hardizh ! A-benn bloaz e konter 3000 skollad bennak o teskiñ pep tra dre hantouriezh an iwerzhoneg.

Koulskoude eo atav a-bouez kaout asant an dud. N'eus ket tu d'o rediañ, hag evit magañ youl-vat e'ch erbeder d'ar ouezelegerien, pa vez unan bennak

er gompagnunezh ha ne oar ket ar yezh, ober evit darn da vighañ gant ar saozneg.

Gouzout piv a oar iwerzhoneg pe brezhoneg

En ur gevredigezh ma'z eo diaes gouzout piv a oar iwerzhoneg ez eo mat d'ar re a fell dezho e ve komzet gant ar muiañ a dud ar gwellañ reiñ an drase da c'houtout war-bouez un arouez. Kinniget e vez e gwirionez daou seurt arouez gant kuzul broadel an iwerzhoneg : ur walenn aour evit ar re varrek, unan archant evit ar re a oar un tammig. Da bremañ e vez (ne vez ket a arnodenn). Siwazh, ne vez ket douget gant an darn vrasañ eus ar re o deus unan. Daoust hag ez eo en abeg ma vez ret a lemañ hag e adlakaat bep tro ma c'hañcher chipenn pe kortenn...? E kaver re gouistus prenañ meur a hini ? Ha re eunik on o soñjal e c'hallfe an nebeut skouerioù am eus roet —re all a vefe— talvezout ivez evit ladañ implij ar brezhoneg ? N'ouzont ket hag eñ e vez aozet c'hoazh arnodennoù an Trech, evel ma raed 50 vloaz'zo hag e veze roet neuze un arouez d'an drec'harrien. Kredif a ran e talvezfe ar boan da unan bennak eus aozadurioù ar brezhoneg stagañ gant ur raklun heñvel ouzh ar "Fáinne" iwerzhonat. Daou seurt a vefe ivez. Tu a vefe da aozañ traoù brav a-walc'h na goustfent ket muloc'h eget 10 pe 20 ltr. Unan evit pap chipenn korfenn pe borpant, kement hag ober. Er stad m'emañ ar brezhoneg, ha skignet ar re a fell dezho ober gantañ e mor e c'hallerien, dianav an eil re d'ar re all, e kavan souezhus n'eus bet graet netra evit seveniñ saurt memad. Dao dezhi 'ta ! A-zevri, evelato ■

Deskiñ brezhoneg d'an daoullam e Skol-Veur Breizh-Uhel Roazhon II.

Dalc'h 1992
 Ar "c'h-Crash-course" brezhoneg aozet gant Servij Stummañ Dibaouez Skol-Veur Roazhon II a vo dalc'het adalek ar Meurzh 7 a viz Gouere da 2 eur betek al lun 13 a viz Gouere da 6 eur.
 Gant un implijer pe un aozadur e c'hell bezañ sammet ar mizoù enskrivañ war gont ar stummezhibaoz.
 8 suvezhiad kentelioù a vo bemdez.
 Gant Strolladoù bihan e vo labouret dindan renerzh kelennerien gourdon ouzh an hentennoù deskiñ d'an daoullam.
 Degemeret e vo an holl liveoù : an hini ne oar ger ebet koulz hag an hini barrek-mat dija.
 Dindan renerzh pedagogel Lukian Kergoat emañ ar staj.
 Evit gouzout hiroc'h hag en em enskrivañ :

Servij Stummezhibaoz
 ha Deskadurezh Hollbad
 Skol-Veur Roazhon 2 Breizh-Uhel
 6, Bal Gaston Berger
 35043 Roazhon Cedex
 Pg. 99.33.51.93

Skol-Veur Hañv

KEAV a gemenn e vo dalc'het kamp 1992 e Skaer e Skol Joliot Curie eus an 20 d'an 31 a viz Gouere.
 Live ar berzhidi a zle bezañ war-dro ur bloavezh-skol-studi, rak n'eus nemet brezhoneg e-pad ar staj. N'eo ket ur staj evit kregiñ gant ar yezh, met unan evit hec'h implijout e pep degouezh eus ar vuhez.


Al labour e-pad ar staj
 Kentelioù a bep live ; bodadoù komz etre un nebeut tud, evit ma c'hellfe pep hini kemer perzh er c'hennvidioù ; kaozeadennoù graet koulz gant aozerien ar staj, ar skolidi ha tud o tont eus an diavaez.
 Filmoù, montajoù, sonerezh, dansoù, h.a...
 Evit kaout diskleriadurioù skrivañ da : K.E.A.V., 22 hent Moulouen, 29000 Kemper



Sonerezh Kasedig nevez evit ar vugale

A bouez penn eo anv ar c'hasedig 1añ-mañ. Re all a vo da heul, hervez an aozerien. Gant ma rint berzh ha ma vo kalz a selaouerien yaouank evit o vrudañ en o skol, e-touez bugale o c'harter !
 12 kanaouenn a ya d'ober ar c'hasedig, lod anvet mat, lod all nevez savet. Kanerien Storlok a gan anezho, ar sonerezh zo kompennet, c'hoariet, enrollet ha kemmesket gant Kristian Desbordes.
 85 lur an tamm, e ti Skol Diwan Lesneven-29260, gant ul levrig evit ar c'homzoù.

Divunadell



Klaskit e pelec'h 'vez graet ar pin's "Région Bretagne" ?
 (El Ligêr - Atlantel, geo, geo !)

Deskiñ brezhoneg gant kumuniezh Stez Anna

An hini a vez o teskiñ brezhoneg a rank c'hoazh kaout an dro da ober gantañ o kemer plijadur ivez ; a-hend-all ne welo ket da betra e servij ar brezhoneg, hag a-benn ar fin e vo distailet gantañ gant gwir abeg. Nebeutoc'h-nebeutañ a vrezhoneg a vez klevet gant an dud e Breizh-Izel avat. Penaos ober neuze ? Perak ne ginnigte ket an emsaverion a c'hell hen ober degemer paotred ha merc'hed yaouank er gêr a-pad an hañv war zigarez deskiñ ar yezh marc'had-mat diouzh un tu ha diouzh un tu all sikour an dud a roio degemer dezho. Evel-se ez ae en-dro ar gevredigezh 'Brezhoneg Yezh Vev'.
 Gant ar spered-se e kinnig paotred Tiegezh Santez Anna nevez-stallet e Kistinid d'an dud yaouank (pe goshoc'h zoken) a garfe en em varrekaat war ar yezh, ma kemerent perzh en o buhez (en ur virout evelkent kalz a amzer vak hag a frankiz, anat eo) e-pad pemzakerz (eil hanterenn miz Eost). En eskemm eus o skoaerell war al labourioù (kompenn an tiez, llozh, levrageg, pep hini diouzh e varregezh) e vezint lojet ha maget evit ur bennoz Doue, ha ne glevint ger gallek ebet. N'eo ket difannet d'ar gelennerion war ar brezhoneg (na d'ar re all) kelaouiñ an dud a c'hellfe bezañ dedennet, war zigarez mont er-maez eus kêr ha dizoleiñ traoù ar vro dre ur c'homadenn en ur barrezig a Vreizh-Izel.

T.G.

Na zisoñjit ket adkoumanantiñ da vBREMAÑ !
Ingal e teu ho kelaouenn er-maez (abaoe 12 vloaz !), n'eo ket ingal e teu ho kwennefen ...
... siwazh !
180 lur ar bloaz.
BREMAÑ,
8, STRAED HOCHÉ - ROAZHON

Emvod meur 92 Diwan



a-gleiz da zehoù : D. Kernalegenn, A. Lavanant, Y. ar Merdy, L. Bocquenet, T. Louarn, E. Doreau
 Da gefver kendalc'h bloaziek Diwan dalc'het d'ar 4 ha 5 a viz Ebrél e Treglonou ez eo bet anvet Tangi Louarn hag Ivonig ar Merdy da izili nevez burev ar gevredigezh.

N'eo ket al labour a vanko d'ar skipailh evit dont a-benn da dizhout ar pal a 1000 bugel skoliataet e Brezhoneg evit miz Gwengolo 92 !



Pegen plijus eo degemer keleier eus ar bed a-bezh !

E-pad ar sizhunvezh "ar c'helaouiñ er skol" ez eus bat tu evit skolioù 'zo e Kemper da gaout ur faks. Diwan a oa unan diouto.
 Ar vugale o deus gallet evel-se daremprediñ bugale ar broioù all o kas pe resev istorioù ha tresadennoù.

Hervez ar vugale "kalz plijusoc'h eo resevout eget kas, diptus eo e yafe kuit ar mekanik faks, met reizh eo evit ar vugale all da gaout anezhañ ivez". Un trouz ! setu ur faks o tont ha tout ar vugale da redek war-zu ar mekanik da welout ar follenn o tont er-maez !

30vet deiz-ha-bloaz Oaled Abherve

Lidet e vo e miz Mae tregontvet deiz ha bloaz kreizenn sevenadurel breizhek Sant-Brieg gant

Sonerezh : d'ar yaou 14 a viz Mae, un abadenn sonerezh gant ar strollad Maogan er MJC Point du jour St Brieg da 8eur hanter. 35 lur. (sonerezh eus Bro Iwerzhon a vo klevet met ivez un toullad tonioù eus Breizh hag ar broioù keltiek all. Daou soner a vicher a gaver e-barzh Maogan : Christian Le Maitre ha Ronan Ar Bars).

Iwerzhon : D'ar gwener er Sal Oaled, ur abadenn luc'hannoù diwar benn Bro Iwerzhon gant Rojer Moizan, Gwelet e vo dreist holl Norzh ha tu Kornog ha Gwalarn an Enezenn. Graet en deus R. Moizan ouzhpenn ugent mil kimometr ad en Iwerzhon. (20 lur).
Istor : D'ar sadorn 15 e vo gwelet Kêr St Brieg gwechall gant un den a vicher goude marañ e vo ur gentel istor Vreizh en Oaled da 2 eur.

Diwan Sant Brieg

Fest Noz : (Diouzh an noz !) 16 a viz Mae vo ur fest-noz e Skol Diwan gant "ar Re Yaouank", kan ha diskan Jolivet-Gelleg... h.a... (aozet gant Komite Skoaerell Diwan Sant Brieg).

Pred : D'ar Sul ur pred bras gant an Oaled er Ville Guyomard. Pellgomz 96.94.15.54 pe da Yola Chariou 16 stradaed Berlioz e St Brieg. (enskrivadurioù araoek an 8 a viz Mae gant ur c'henn a 100 lur, hanter briz etre 5 ha 10 bloaz, netra dindan 5 bloaz.)

Festoù-nnoz all

D'an 23 a viz Mae Fest-Noz gant : Ar Vreudeur Morvan - A. Ebrél ha M. Guilloux - A. Thomas ha D. Philippe - G. Malrieux O. Urvoy ha JP. Le Naour e Pontrev (2)

Bro Roazhon

D'ar Yaou 14 a viz Mae e Gwern, fest-noz gant Diaoulad ar Menez, aozet gant Kal'ch Keltiek Gwern.

Bro Bariz

Fest-Noz Vras E Plaisir (Bro-Bariz) d'ar Sadorn 16 a viz Mae gant Diaoulad Ar Menez - Aozet gant kevredigezh "Mesaerien ar Menez" (Poissy).

Len a rank ober an holl

Levriou nevez deuet er-maez e Breizh

"Eus un amzer'zo bet" gant Per Denez

Mouladurioù Hor Yezh. Eil trimiziad 92. Tereza Desbordes -1, pl. Charles Peguy - 29260 Lesneven.

Un dastumad danevelloù aes ha plijus da lenn eo "Eus un amzer zo bet". Setu amañ da heul pezh a lavar ar skrivagner e pajennoù-kinnig e levr :

"Lennegezh pe get ?"

(...) Pelloc'h avat eget ar yezh ez a an engouestil. N'hell ket un den skrivañ hep en em lakaat en e bezh en e skrid, a-ouez pe dic'houvez dezhañ. Evidon n'hellan ket klekañ ar stourm diouzh un tu hag al lennegezh diouzh an tu all, evel ur seurt liorzhi kuzh gwarezet-aketus diouzh korventenn ha reklam. Anat eo, n'eus ket ebet aze da lavarout e vefe gwir bater -na diwir bater kennebeut- an darvoudoù a zo bet taolennet amañ hag ahont em skridoù, daoust ma'm bije ket kalz a biljadur ma vije choarvezet ganin lod anezho, lod anezho hepken. Met ar skrivan, an endro, ar mennoziñ, ar vro, al lec'hioù, an tiez -an dud o tremen- a zo gwir, ez eus pe ez eus bet diout, amañ, ahont, du-se. Ha n'hellan ket lec'hout diouzh ar pleg a zou gant an oad-ar pleg da vevañ en-dro, dre va faltazi, - el lec'hioù a zo bet re va yaouankiz, gant an dud am eus neuze karet.

Hag en-vroennou, un deiz bennak, a skrivin, evel ma'z alian kement a dud d'ober, och adkrouin evit ar rumadoù da zont -spi am eus e vo diout !- an amzervezh am eus treuzet, un doare ma soñj din bezañ graet va zreizh drezi ? N'ouzon ket. Em danevelloù, marteze, nann, sur-mat ! e vint kavet disklæer, luziet, dic'hortoz a-wechoù gant al lenner, -ez eus taolennoù, ha tud, a zo tost d'am c'hatal.

Danevelloù all a vo, favenibus deis, ma lez ar stourm pemdeziek un tamm amzer ganin da stourm ivez dre ar blienn hag ar paper. Da c'hortoz un eostad all, e kinnigan kement-mañ amañ da heul d'am c'hille kozh : an hevelep tonkadur a oa bet planedennet deomp hon-daou, en avat a zo aet re dost d'an islonk ha kouezhet eo e-barzh araozon : neuze n'eo ket d'am c'hille o chinnigan, n'hell ket mui o lenn, met da envor, da envor kompagnon va c'hiammedoù kentañ ar stourm lennegel : Artomagalos e zaoulagad c'hris hag e vouse'hoazh bepred diwar souezh.

Per Denez



"E-kreiz Breizh ha reizh"

gant Per-Vari Kerloc'h -Dastumad Skrid-Embannadurioù Hor Yezh 1992.

Un dastumad dudius a 91 kanaouenn savet gant ar barzh diwar darvoudoù c'hoarvezet en hor bro. Stourm, karantez, huñvre, fulor, c'hwervoni, spi, kimiad, darc'hel, sevel... Stagañ ganti. Setu lusk ar skridoù deut diwar dorn Per-Vari :

"Ret eo da bep hini Skarzhañ ha kompenn an ti. Alies c'hwazañ e fri Kent seveniñ ar revuzti!"

"Buhezskrid Ar Roueri"

Emañ IMBOURC'H o paouez embann "Buhezskrid Ar Roueri", un oberenn nevez-skrivet gant Yann-Vari Bouessel du Bourg diwar-benn an den a savas emsav "Breuziezh Vreizh" a-enep d'an dispac'h pa vo tennet kuit hor frankiz hep goullenn ali hor parlamant, e-pad nozvezh ar 4 a viz Eost 1789. Goullenn an niv. 266 : 30 lur eo. Ar skodenn-vloaz a sav da 250 lur hepken evit an 12 niverenn hag ar stagadennoù : ar bloaz-mañ,

"Renkennadur DEWEY" gant Ti-Gwilh mod "Lennadurioù evit amzer pask" gant Klêrg ; hag eil lodenn "Gourbannoù Sant Eosten", troet gant Jij Ewan. Skrivañ da Imbourc'h, 8 straed ar Marchiz, 56 230 Kistreberzh.

Ur gammed war-raok Tezenn vrezhonek Erwan Vallerie

Erwan Vallerie, bet diskibl an Aotrou kelenner Leon Fleuriot, a zo anavezet gant kement hini a bled gant istor Breizh hag ar brezhoneg evit e levr "Communes Bretonnes Paroisses d'Armorique" embannet e 1986 (Embannadurioù Beltan). Emañ o paouez bezañ degemeret da zoktor Skol-Veur Breizh Uhel.

D'an 21 a viz Meurzh 1992 eo bet difennet gantañ e dazenn, savet e brezhoneg penn-da-benn, ouzhpenn 800 pajenn enni, dirak ur juri a oa Donatien Laurent, rener ar CRBC e Skol-Veur Breizh Izel, en e benn. E touez ar varnerien e konted c'hoazh, ouzhpenn Per Denez, a renas labour E. Vallerie goude marv trum L. Fleuriot, Jean Yves Urien ha Gwenael An Dug, kelennerien o-daou e SVBU, ha Claude Sterckx, kelenner e Skol-Veur Brussels, pezh a ziskouez (mard eo ret hen diskouez c'hoazh) e taoler pled gant hor yezh en tu-hont da vevennoù hol lodenez karet.

War-lerc'h ar soutenans (a voe renet e galleg, hervez reolenn ar Skol-Veur), e voe roet gant ar varnerien a-unvouezh ar meneg uhelañ (enorus-meurbet gant gourc'hemenoù ar jur) d'al labour-se a eilpenn ar mennoziñ a rene betek-hen war orin hag istor ar brezhoneg, hag a gas studi an anvioù-lec'h da live ur gelennadurezh skiantel-rik.

Miret eo ar gwirioù-embann (ken evit ar skrid-orin brezhonek hag evit troidigezhioù) gant an Embannadurioù Beltan.

Lennt al liamm
Skrivañ da AL LIAMM
16 straed des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -
Koumanant bloaz 150 lur
(studierien, tud dlabour
100 lur)

Danevelloù

Troet gant Roparz Hemon, diwar Miguel de Cervantes, P. a. de Alarcón, E.T.A. Hoffmann, A. von Chamisso, W. Irving hag A. Novikov-Priboi


An holl a oar en deus Roparz Hemon, diazezer ha rener Gwalarn, savet yezhadurioù, levrioù da zeskin ar yezh, geriadurioù, romantoù, danevelloù, pezhioù-choari, barzhonegoù ...

E-touez donezonoù niverus an den souezhez-se ez eus lod hag a zo marteze nebeutoc'h anavezet : Roparz Hemon a zo bet embannet e 1986 (Embannadurioù Beltan) an anv a lennegezh din eus ar bed, ha kroget eo da dreñ e brezhoneg skridoù savet gant skrivagnerien estren.

E 1988 en doa Mouladurioù Hor Yezh kinniget d'ar vrezhonegerien un dibab kentañ eus danevelloù troet gant Roparz Hemon, ennañ skridoù diwar Nathaniel Hawthorne, Gustavo Adolfo Becquer ha Bret Harte. An holl anezho a oa bet embannet pe war Ar bed keltiek, pe war Al Liamm, da lavarout eo war-lerc'h ar brezel. En torkad-mañ da heul e vo kavet daou skrid embannet a-raok ar brezel e-barzh Gwalarn, unan gant E. T. A. Hoffmann, unan all gant ur skrivagner rusian anvet A. Novikov-Priboi. En holl e ro Mouladurioù Hor Yezh en dro-mañ seizh danevell, troet diwar ar spagnoleg, an almaneg, ar saozneg hag an esperanteg.

Bep daou viz lennit
AL LANV
59 hent Kerdonoù Vihan
29000 Kemper
Koumanant bloaz : 100 lur
Skoazell adalek 130 lur

Nevez embannet
Goude ar goloioù-lizher "Breizh Unvan", e kinnig deoc'h Komite CUAB - Bro Pariz ur golo-lizher nevez : "Skolioù Meur Breizh ; Brest-Roazhon-Naoned". War baper gwenn pe paper kraft melen 500 golo : 150 lur ha 180 lur. Dre ar munud - 25 golo evit 15 pe 18 lur.
Skrivañ da : E. Pianezza - 106, rue de la côte du Moulin - 78620 - L'etang - La Ville.



E korn an oaled

gant Kristof Jezegou, embannet gant Emgleo Breiz.

Breiz souezus en doa graet al lev-se pa oa bet embannet evit ar wech kentañ e 1923. Ret eo lavarout e kiote dres gant sturmm-spered hor c'henvroiz. Istor Paotr Kastellin a rae an amzer, fall pe vat, a zo chomet brudal. Sur e plijo kalz d'ar vrezhonegerien a-vremañ ar c'hontadennoù-se, a veze dibonet gwechall-gozh e korn an oaled. Lavaromp ouzhpenn ez eo brezhoneg Jezegou unan eus ar re wellañ. Ul lev 207 pajenn, 60 lur, e gwerz en holl stalioù-levrioù, pe digant Mesidou, 40bis str ar Republik, 29200 Brest, hep mizoù-kas.

Kêr Iz, ar gêr villiget

Pezh-c'hoari gant Goulchan Kervella, bet c'hoariet gant Ar Vro Bagan.

Anavezetañ mojen Breizh-Izel an hini eo istor Kêr Iz hag hini ar plac'h a oa e-barzh, Dahud. Danevellet eo bet meur a wech, pe dre skrid, pe dre zonerzh. Adkemeret eo bet gant Strollad ar Vro Bagan, ha c'hoariet war aodoù Brignogan e 1990. Ul levrig 48 pajenn, 20 lur.

Biskoazh kement-all !

C'hwec'hvet levrenn, gant P. J. Helias.

N'eo ket ret ken kinnig ar pezhioù-c'hoari-se a zedennas miliadoù a selaoerien war Radio-Kimerch, bep sul goude lein, goude amzer an dieubidigezh.
Ul levrig 112 pajenn, 40 lur.

Keryann

gant Goulchan Kervella

Choant en deus Keryann darc'hel soñj eus an amzer dremenet pa oa e bati e vrud. Da heul ar beajour Miorcec Kerdanet hag ar Furlukin diskennet diouzh bolz ar chapel e ya an dud a-dreuz ar c'hastell, a-hed an amzer. Setu-int o poumen e-kreiz an istor hag ar mojennoù.

E 1990 eo bet savet an abadenn-se, e kastell Keryann, e parrez Sant Nouga. Ul levrig 92 pajenn, 40 lur (38 lur evit izili Klub al levrioù brezhoneg), e gwerz en holl stalioù, pe hep mizoù kas, digant Mesidou, 40bis, str ar Republik, 29200 Brest.

Ar Vouguo

Romant, gant Mikael Madeg

Pavare romant Mikael Madeg eo "Ar Vouguo", hag evel an daou a-raok, eo adarre un istor lec'hiet strizh en Arvor Bro Leon. Istor ur c'hrennard savet da gentañ e Bro-Bariz, hag a zo kaset en un tiegezh bihan harp en aod etre, lakomp, Brest ha Konk-Leon, e tiegezh gindidik e vamm. Eno, e-pad bloavezhioù an eil brezel-bed, e vev e-unan gant e gendev, ha, dreist-holl, e gentervezed. Un doare pimpatrom a romant emezekin eo, hag un istor a kemañ, tremen daou c'hant pajenn dezhañ. Hag ur romant ennañ lusk, sioul a-ziavaez, diroll a-ziabarzh, ar gaoteriad santad m'eo spered ur c'hrennard a baotr en aod-se. Embannet gant Brud Nevez, 60 lur (57 lur evit izili Kleub al Levrioù brezhoneg). E gwerz en holl stalioù levrioù, pe hep mizoù-kas, digant Mesidou, 40 bis str ar Republik, 29200 Brest (Pellgomz : 98 80 49 70).

8 a viz Mae

Tro Menez Are 1992 - Sant Riwal - Teir zrolad = 10 km, 20 km, 40 km. Adalek 16e betek an noz : abadenn sonerezh, 18e Pred giz ar maezioù, Adalek 21e : Fast-Noz hengounel, giz ar Menez Are - Skol Diwan - 29540 Komana.

27 a viz Mae

- Pavare Bodadeg Etrebroadel Ar Dreujenn-Gael e Kreiz-Breizh 27-31 a viz Mae - Barrien-Groñvel. Sonerezh ha pijadur !
Darempred : 98.93.04.42/96.29.12.84.

Gouel Broadel ar Brezhoneg

5-6-7 a viz Even

E Speied e vo dalc'het ar pep brasañ eus c'hwec'hvet Gouel Broadel ar Brezhoneg. Ur cheñchamant kentañ e-keñver warlene eo. Kalz a draoù nevez all a vo hevlene avat.

N'eo ket dre ma vije savet kudenn pe gudenn gant kêr Karaez e oa bet divizet gant aozerien Gouel Broadel ar Brezhoneg kuitaat Karaez evit mont da Speied. Re vihan e oa deuet da vezañ al lec'hioù gouest da zegemer ar gouel e Karaez ha muioc'h a ichoù a vo e Spezed. Setu aze abeg nemetañ ar cheñchamant.

Muioc'h c'hoazh a vrezhoneg !

Strivet e vo ar bloaz-mañ evit diskouez d'an holl e c'heller tremen hep ar galleg.

Bilhedoù a vo embannet (tri bilhed disheñvel), brezhoneg ha bretoned warno, a gemero lec'h ar bilhedoù gall e-pad tri devezh. N'eo ket hepken war dachenn ar gouel e vint degemeret hogen ivez gant holl kenwerzhourien Speied.

Brezhonekaet penn-da-benn e vo ivez pane-llerezh Speied ha pa vefe ofisiel pe genwerzhel. Kenwerzhourien ar bourk o deus degemeret mat ar mennoz da guzhat o fanelloù gallek e-pad ar gouel. Ar spi zo e pado pelloc'h eget ar gouel un nebeud eus ar panneloù a vo staliet. Ur skwer e vo ivez evit kêrioù all Breizh. Evit brudañ muioc'h c'hoazh an taol-arnod-mañ e vo embannet gant ar Greizenn Enklask war an Anvioù-lec'h hag ar panneloù-heñchañ eus Skol-Uhel ar Vro ur follenn bleg-displeg, warni an holl troidigezhioù a vo tu da welet e Spezed ha titouroù evit brezhonekaat ar vuhez foran.


Sportoù

Unan eus an traoù nevez all a vo er gouel hevlene e vo al lec'h a bouez roet d'ar sportoù. Matchoù mell-droad a vo, un dolpadeg VTT, triadoù war droad er vro hep ankounac'haat un droiad kevrinus all... an droiad Coreff !...

Moarvat e vo dedennet kalz a dud eus ar Vro gant an holl sportoù-mañ hag e skoazello ar gouel d'ober muioc'h a verzh c'hoazh eget ar bloavezhioù tremenet.

Menegiñ a c'heller ivez e vo aozet c'hoarioù evit ar vugale, ar pezh a vanke er bloavezhioù all.

5-6-7 a viz Mezheven, tri devezh da islinennañ gant ruz war ho teiziataer !



D'ar Gwener 5 e Karaez **Laz-kanañ** "Kanerien Sant Karanteg" en iliz Karaez

D'ar Sadorn 6 e Speied E sal "An drezenn bod" e vo un abaden-sonerezh gant **Alan Stivell** hag e strollad, hag ur fest-noz da echuiñ gant Ar Re Yaouank ha Strobinnell, e sal ar sportoù.

D'ar Sul 7 e Speied **Diskouezadegoù** war ar standoù (un 60 bennak)

Sonerezh kêr gant Bagad Kemper

Matchoù football : krogadoù etre skoloù : bugale ar skolioù brezhoneg e Breizh ha yaouankizioù Speied. Ur c'hrogad etre un dibab c'hoarierien Speied ha strolladoù tro-war-dro, hag ur strollad c'hoarierien kozh a-vicher eus Roazhon ha Gwengamp

Gourenadeg gant gwellañ paotred vat Breizh

C'hoarioù e-giz gwechall : sachadeg fun, bazh yod, sevel ar berchenn ...

Abadenn veur da heul, e sal ar sportoù, gant Roland Becker, E.V., Dibenn, Rêves de gosse, Bagad Kemper, Shannon, Klig ha Farz

Pezh c'hoari e brezhoneg gant strollad Speied

Fest-noz bras gant Storvan, Daouarn ha sonerien ha kanerien all

Aozet e vo pourmennadennoù tro ar barrez, war droad pe war marc'h-houarn, evit dizoleiñ Speied hag ar maezioù tro-dro.